

Modèle CCYC : ©DNE

Nom de famille (naissance) :


(Suivi s'il y a lieu, du nom d'usage)

Prénom(s) :

N° candidat : **N° d'inscription** :

(Les numéros figurent sur la convocation.)

Né(e) le : / /

 LIBERTÉ • ÉGALITÉ • FRATERNITÉ
RÉPUBLIQUE FRANÇAISE

1.1

ÉVALUATION

CLASSE : Première

VOIE : Générale Technologique Toutes voies (LV)

ENSEIGNEMENT : breton

DURÉE DE L'ÉPREUVE : 1h30

Niveaux visés (LV) : LVA **B1-B2** LVB **A2-B1**

Axes de programme : **Axe 5** : « Fictions et réalités »

CALCULATRICE AUTORISÉE : Oui Non

DICTIONNAIRE AUTORISÉ : Oui Non

Ce sujet contient des parties à rendre par le candidat avec sa copie. De ce fait, il ne peut être dupliqué et doit être imprimé pour chaque candidat afin d'assurer ensuite sa bonne numérisation.

Ce sujet intègre des éléments en couleur. S'il est choisi par l'équipe pédagogique, il est nécessaire que chaque élève dispose d'une impression en couleur.

Ce sujet contient des pièces jointes de type audio ou vidéo qu'il faudra télécharger et jouer le jour de l'épreuve.

Nombre total de pages : 4

Baccalauréat général et technologique
Langues vivantes régionales - Breton

Classe de première

Compréhension de l'écrit et expression écrite
(3^e trimestre)

<u>Niveau visé</u> LVB : A2-B1	<u>Durée de l'épreuve</u> 1 h 30	<u>Barème 20 points</u> CE : 10 points EE : 10 points
---	---	--

L'ensemble du sujet porte sur l'**axe 5** du programme : **Fictions et réalités**

Il s'organise en deux parties :

- 1- Compréhension de l'écrit**
- 2- Expression écrite**

Vous disposez d'**une heure trente** pour prendre connaissance de l'intégralité du dossier et pour traiter la compréhension de l'écrit (partie 1) et le sujet d'expression écrite (partie 2) **en breton**.

Ur pakad du er stêr

Ar sulvezh-se, an amzer a oa klouar ha, peogwir e oa bras an dour er stêr, Lukaz, skluzier Penn-ar-Pont, en doa kavet brav kemer e higenn ha mont da besketa.

Lukaz a oa azezet war bord ar stêr vras, e-touez ar geot hir, ha ne zistage ket e sell a-ziwar ar bont spoue kenkas e vije deuet ur pesk bennak da bismigañ ar vuzhugenn ha d'he lonkañ. Hogen, pesk ebet ne dostae ; 'm eus aon n'o doa ket naon ar sulvezh-se, ha Lukaz, pesketaer dispar, ne gare ket koll e amzer en un takad goull. Lukaz a savas e higenn hag a lakaas warni ur vuzhugenn all.

Edo o sevel evit mont uheloc'h, pa daolas ur sell war-du ar skluz. Petra a wele du-hont ? Ur pakad du o vont d'an traoñ gant tizh an dour ! Buan, Lukaz a eeunas e lunedoù war e fri, mes pa sellas evit an eil gwech, ne welas mui netra : ar pakad du a oa aet dreist ar skluz.

Lukaz a yeas pelloc'hik. Teurel a reas adarre e higenn en dour. Ar pesked avat, eno evel en traoñ, a oa leun o c'hof, hag hini ebet anezho, d'ar mare-se eus an deiz, ne zeuas da bismigañ higenn ar pesketaer. Lukaz, avat, ne oa mui nec'het gant higenn na gant pesk ; gant ar pakad a oa aet dreist ar skluz, ne lavaran ket.

– Ar pakad du-se, emezañ, petra eo ? Ma n'eo ket un den beuzet ?

Un den beuzet e tle bezañ, a soñjas Lukaz, ha kerkent e savas adarre e higenn hag e kerzhas war-eeun d'ar gêr.

A-boan ma oa degouezhet Lukaz en ti, ma teuas ivez en diabarzh daou baotr eus Lotei, Job ha Lom dre o anv badeziant. [...]

Job ha Lom a zeuas e ti ar skluzier, unan o kanañ hag an hini all o tiskanañ.

– Salud, Lukaz ! emezo.

– Salud deoc'h ! eme Lukaz. Hag a nevez ?

Da Job ha Lom, netra nevez en o buhez. Lukaz, avat, en doa un dra bennak nevez da lavarout dezho, rak ur c'heloù eus ar seurt a zo ur pouez re bounner, ha ret eo disammañ an teod dirak an den kentañ a vo kavet war an hent, na pa vefe roue pe pilhaouer.

– Azezit ! eme Lukaz dezho, ma kemerot ur chopinad sistr.

Lukaz a grogas gant e istor.

– Soñjit 'ta ! emezañ, bremaik edon o pesketa aze, e-tal ar foenneg hir, pa em eus gwelet, o ! gwelet sklaer ha fraezh gant va daoulagad, ur pakad traoù heñvel ouzh korf un den o vont dreist ar skluz. Ker sur hag emañ dirazoc'h, ar pakad-se a zo un den beuzet !

– Un den beuzet , emezo, un den beuzet ! Penaos e c'hellit gouzout sur e oa un den beuzet ?

– Penaos ? Penaos ? Pardienn ! abalamour am eus gwelet anezhañ.

– Ha penaos e oa gwisket an den ?

– E du e oa gwisket penn-kil-ha-troad, rak e benn em eus remerket hag e dreid em eus remerket ivez.

Diwar Jakez Riou, *An ti Satanazet*, Skridoù Breizh, 1944

1. Compréhension de l'écrit (10 points)

Respontit e brezhoneg d'ar goulennoù amañ war-lerc'h :

- Piv eo Lukaz ? Petra a blij dezhañ ober e-pad e amzer vak ?
- Petra zo c'hoarvezet hiziv ?
- Klask a ra Lukaz prouiñ ez eo gwir ar c'heloù roet gantañ. Penaos ?

2. Expression écrite (10 points)

Respontit e brezhoneg da unan eus an daou c'houlenn amañ war-lerc'h.

Savit ur pennad-skrid a 120 ger d'an nebeutañ.

Goulenn A

Kontit ar pezh a zo o vont da c'hoarvezout goude en istor, d'ho soñj.

Goulenn B

« Gwir eo peogwir e lavaran deoc'h ! ». Ha c'hwi, prest oc'h da grediñ ar pezh a vez kontet deoc'h, pe ar pezh a lennit war ar rouedadoù sokial ?